

# C'HOUARIVA

*A.O. ROBERTS*

AR C'HOUMOUL A DEC'H

*T.C. MURRAY*

NEVEZ-AMZER

*troet*

gant Roparz Hemon

SKRID 50

1988

*A.O. ROBERTS*

**AR C'HOUMOUL A DEC'H**

*T.C. MURRAY*

**NEVEZ-AMZER**

troet e brezhoneg gant  
ROPARZ HEMON

SKRID

Koumanant da *Skrid* evit peder niverenn : 60,00 lur; da vezañ kaset  
da : *Denez, Ri, Ploare 29100 Douarnenez*

En hor rummad pezhioù-c'hoari troet gant Roparz Hemon ez  
embannomp hiziv daou bezh eus ar broioù keltiek, unan o tont eus  
Kembre, egile eus Iwerzhon: *Ar C'houmoul a Dec'h* gant **A.O. Roberts**  
ha *Nevez-Amzer* gant **T.C. Murray**.

Sofij o deus hol lennerien eus ar "c'hoariva troet" kinniget dezho er  
mizioù tremenet: *Skrid 48: Carlo Gozzi, Ar Roue Karv, Lope de  
Rueda, An Avaloù; Skrid 49: Cervantes, Ar Vatezh Diwallet-Mat*  
hag *Ar C'hloareg Sorser, Plautus, Ar Podad Aour*.

**Skrid niverenn 50**

diskleriet hervez lezenn  
ti-moulañ prevez  
Rêner : Gwendal Denez  
Ri, Ploare 29100 Douarnenez  
© 1988 pep gwir miret strizh

Priz : 30,00 lur

*Ar C'houmoul  
a Dec'h*

*studiadenn e gwenn ha du*

*A.O. Roberts*

TUD AR C'HOARI

Ur wreg  
Hec'h ozhac'h  
An droukspered  
Ur c'hlasker-bara

*Lec'h : un ti sioul e Kembre  
Amzer : derc'hent Nedeleg, diwezhat-tre*

Pa sav ar ouel, kentañ tra a welit eo ur gantol war enaou, ha dremm ha neuz ur vaouez, displann. Dre ma teu ho taoulagad da vezañ boas ouzh an deñvalijenn, e verzit ur wreg, o lenn gant poan en ul levr, a ziskouez bezañ Bibl an ti. Emañ ar Bibl war un daol grenn ha kozh, ha lakaet eo bet ar gantol, damdost, en ur pikol kantolor maen. A-zehou e welit skleur un dra bennak, a dle bezañ un tantadig paour, disked. E traoñ ar gambr, n'eus enni, hervez doare, nemet nebeut a arreburi, ez eus ur prenestr, hag, a-gleiz, un nor da vont er-maez. Ar wreg, ha hi na yaouank na kozh, a seblant bezañ kalz koshoc'h eget m'eo e gwirionez. Kramennet eo he dremm, roufennet-don. Krommet eo he daouarn gant al labour. Rouez eo he blev gwenn. Diouzh he gwelout ez eo anat eo mantret ha gwall nec'het. Lenn a ra, fomet gant ar pezh a lenn. Stumm-lavar he c'horn-bro a zo ganti. Leun eo ar gambr a skeudoù.

Ar wreg (o lenn ar Salmoù a vouezh uhel): "Sevel a ran va daoulagad etrezek ar menezioù. A belec'h e teuy skoazell din? Skoazell a zeuy din a-berzh an Aotrou, en deus graet an Neñv hag an Douar. Ne lezo ket da droad da strebotiñ. An Hini az tiwall ne voredo ket. An Hini a ziwall Israel ne voredo ket ha ne gousko ket..." (Sevel a ra he fenn, ha selaou. Neuze e serr ar Bibl hag ez a betek an nor. O sevel ar c'hliked e tigor anezhi, hag e sell er-maez en deñvalijenn. Neuze e serr an nor, e teu en-dro d'he c'hador, hag o tegeriñ he Bibl e stag adarre da lenn

a vouezh-uhel) "...O Aotrou, na'm argas ket Ez emez, ha na'm c'hastiz ket Ez kounnar. Az pezh truez ouzhin, Aotrou, rak dinerzh on. Gwella ac'hanon, Aotrou, rak krenañ a ra va eskern. Trubuilhet eo va ene. Salv ac'hanon, en abeg da'z madelezh. Rak er Marv ne vez ket a goun ac'hanout. Er bez, piv Az trugarekaio? Skuizhet on o hirvoudiñ. Bemnoz e c'hlebian va gwele a zaeroù. Dourañ a ran va gwele a zaeroù. Losket eo va daoulagad gant ar glac'har. Koshaat a ran en abeg d'an enebourien..." (Stouñ a ra en ur lenn) O Doue, perak ec'h eus va dilezet?

*Eus ar c'horn pellañ e teu mouezh c'hoapaus an droukspered. Ar gambr a deñvala.*

**An droukspered (goapaus):** "O Doue, mar deus un Doue..."

**Ar wreg:** Piv oc'h-c'hwi?... A belec'h e teuit? Piv oc'h-c'hwi?

**An droukspered:** N'anavezet ket ac'hanon? Alies e vezan ganit.

**Ar wreg:** Lavarit din: piv oc'h-c'hwi?

**An droukspered:** Me eo ene da vab.

**Ar wreg:** Va mab?... Deut oc'h da gas din keloù fall eus va mab? Lavarit din... marv eo?

**An droukspered:** Piv 'oar? Emañ pell ac'han.

**Ar wreg:** Nann, n'eo ket gwir... Ul lizher am eus bet digantañ ar sizhun diwezhañ.

**An droukspered:** An dud a varv buan... a-wechoù. Klefivedoù a zeu a-daol-trumm, hag ar marv prim-ha-prim war o lerc'h.

**Ar wreg:** Krefiv eo. Morse n'eo bet klañv.

**An droukspered:** A-wechoù e teu ar marv pa vezer yac'h: er c'hêrioù dreist-holl. Ur froudenn...

**Ar wreg:** Nann, pell amzer en deus bevet er c'hêrioù.

**An droukspered:** A-wechoù e fell d'an dud mervel.

**Ar wreg:** Petra 'lavarit?

**An droukspered:** dilabour eo bet peurliesañ abaoe tri bloaz. Evel-se e teuer da skuizhañ gant ar vuhez. Ha neuze, aes eo mervel. Ur gordenn marteze, ul lamm en dour yen, un tenn fuzuilh. Gant un tenn fuzuilh e vezer lazhet diouzhtu. Da vab a ouie tennañ gant ur fuzuilh.

**Ar wreg:** Va faour kaezh Mabig! Me 'oar ez eo glac'haret. Hogen ne savfe ket e zom outañ e-unan. (An droukspered a c'hoarzh. Ar sklerijenn a ya war deñvalaat) Hogen piv oc'h-c'hwi 'ta? Petra 'glaskit amañ?

**An droukspered:** Me eo ene da verc'h.

**Ar wreg:** Va merc'h? Penaos e vefe gwir? Nann, n'eo ket gwir. Gwashañ barrad-avel a zo n'hell ket ober droug d'ar re a zo er vered.

**An droukspered:** Hogen, o eneoù a vale.

**Ar wreg:** Dienkrez eo bremañ. Emañ hec'h ene er Baradoz.

**An droukspered:** Ha bezañ ez eus ur Baradoz?

**Ar wreg:** An dud vat, pa varvont, a ya d'ar Baradoz.

**An droukspered:** Mervel a reont marteze, ha netra ken. D'an Ifern ez eont marteze.

**Ar wreg:** Ar re fall dilezet gant Doue a ya d'an Ifern. Ur plac'h vat a oa anezhi. Aet eo d'ar Baradoz.

**An droukspered:** A gav dit? Pa varvas, serriñ a rejout ar stalafioù. Gouelañ a rejout. An holl amezeien a zeuas da glask frealziñ ac'hanout. Perak e oueles, mar doa aet d'ar Baradoz? Pa vez ur barrad-amzer en noz, pa yud an avel er siminal, pa strak ar grizilhonoù en tan, ha te a gav dit neuze emañ da verc'h er Baradoz? Te a oar emañ astennet, yen ha gleb, en douar gleb.

**Ar wreg:** Pec'het em eus, Aotrou Doue, pardonit din! Pardonit da unan a nebeut a feiz... Nann, er Baradoz emañ, gant an aelez!

**An droukspered:** Gouzout a rez n'eo ket gwir. Gouzout a rez, e don da galon, n'emañ ket er Baradoz. Ur bec'herez touet e oa.

**Ar wreg:** Ur plac'h vat e oa. Me a oa he mamm! Me a anavez anezhi.

**An droukspered:** A gav dit, e gwirionez?

**Ar wreg:** Karout a rae an iliz hag ar prezegennoù, ha pa veze o labourat, ne oa nemet kantikoù a gane.

**An droukspered:** Marteze ne oa nemet an ton a gare. Karout a rae kanañ.

**Ar wreg (tener):** Ya, karout a rae kanañ. Kanañ a rae o vont gant ar saout... O va bugel, va faour kaezh bugel... Perak e tigorit ar goulioù kozh-se?

**An droukspered:** Kanañ a rae e-pad an hañv, pa veze war an hentoù estrañjourien o vale...

**Ar wreg:** Estrañjourien? Petra he doa-hi d'ober gant estrañjourien?

**An droukspered (gwidreüs):** Marteze netra. Ha kalz marteze... Piv oa an estrañjour-se a oa o chom en Hendre?

**Ar wreg:** ne ouzon ket piv oa. Penaos e oufen-me?

**An droukspered:** Hi a ouie piv oa... Ha soñj ac'h eus eus an devezh-se, e-pad m'edod oc'h ober ar foenn, ma teuas-efi, an heol o lintrañ war e vlev melen? Neuze, da verc'h a zilezas he labour.

**Ar wreg:** Aet oa da gerc'hat laezh trenk. Ar wazed o doa sec'hed.

**An droukspered:** Ha pell amzer e chomas a-raok dont en-dro, ha hi ur plac'h graet da entañ kalon ur paotr, gant he blev du, he daoulagad du, lirzhin, hag he divoc'h ruz. Un deiz e lavaras unan bennak e oa an diaoul en daoulagad-se.

**Ar wreg:** Ha me a lavar deoc'h e oa ur plac'h vat.

**An droukspered:** Pa voe echu ar foennañ, strafuilh a voe enni. Mont a reas da chom e-tal an aod. Ne oa ket heñvel pa zistroas.

**Ar wreg:** Labouret he doa re galet e-pad an eost.

**An droukspered:** Strafiuilh a oa enni abalamour d'un dra bennak. Kavet ec'h eus anezhi ur wech o ouelañ. Diwar neuze e chomas hep mont war-dro an iliz.

**Ar wreg (mantret):** A-walc'h! Perak e lakait ar soñjoù-fall em c'halon?

**An droukspered:** C'hwec'h miz goude e voe beuzet.

**Ar wreg (enkrezet):** Kouezhañ a reas a-ziwar ar voger dismantret er stank, un noz... va merc'hig kaezh... O, perak degas soñj din eus kement-se?... N'hellit ket va lezel e peoc'h?

**An droukspered:** Ul letem oa ganti. Gouzout a ouie an hent. Marteze oa gwell ganti mervel... Tud an iliz a vez garv ouzh paotrezed evelti.

**Ar wreg:** Nann, n'eo ket gwir. Me 'oar n'eo ket gwir! Biskoazh n'eo ket evel-se! Ur plac'h fur oa anezhi. Biskoazh n'eo bet evel-se!

**An droukspered:** Ar verc'h a-wechoù a denn d'he mamm.

**Ar wreg:** Ar verc'h a denn d'he mamm?... Doue ra'm pardono, dre va fazi ne oa ket! Penaos em dije gouezet?... Petra he dije graet ur plac'h yaouank paour?... Gwidreüs oa... Den ne ouie. O, perak ne'm lezit ket da ankounac'haat an holl draoù-se?

**An droukspered:** N'hellez ket ankounac'haat. Pedet ec'h eus alies, ha n'out ket bet evit ankounac'haat. Doue n'en deus ket pardonet dit, moarvat.

**Ar wreg:** O Doue, lavar ez on pardonet! Kas pell diouzhin ar soñjoù fall-mañ... O Doue, perak ne respontez ket? (*An droukspered a c'hoarzh*) Hogen, piv oc'h-c'hwil? Petra oc'h deuet d'ober amañ?

**An droukspered:** Anavezout a rez ac'hanon. Dalc'hmat e vezan en-dro dit. Me eo tasmant da bec'hedoù kozh.

**Ar wreg:** Hogen, pardonet int bet, ...gwalc'het gant gwad an Oan. (*Ar feiz dihunet en he c'hreiz gant ar misionoù gwechall a sav enni adarre. Hep gouzout dezhi e stag da gomz e-giz ur prezegour kembreat kozh*) Doue ra'm pardono, fall on bet gwechall. Fall on bet a-raok bezañ kavet Doue. Hogen bremañ, kavet em eus hor Salver,

ha gwalc'het eo bet va fec'hedoù. Gwelet em eus dremm hor Salver, kurunennet gant drein. E-pad ar Mision. Gwelet em eus dremm hor Salver. Savet en deus E Zorn, ha galvet ac'hanon. Kouezhet on war va fenn, ha gouelet em eus, ha kanet gloar an Aotrou. Rak en nozvezh-se eo bet gwalc'het va fec'hedoù gant an Oan, ha gwennoc'h on eget an erc'h.

**An droukspered:** Te a gav dit ez eo a-walc'h bezañ pardonet? "Ha pec'hedoù an tadoù a gouezho war ar vugale, betek an trede hag ar pevare rummad."

**Ar wreg:** Nann, pardonet on bet gant Doue. N'en dije ket lakaet da c'houzañv ar re n'o doa graet netra.

**An droukspered:** N'ec'h eus biskoazh hufivreet, p'edo da verc'h war da varlenn, e korn an oaled, e weljes un deiz an amezeien o tegas dit he c'horf marv war ur c'hravazh? (*Ar wreg a guzh he dremm en he daouarn. Ar skeudoù a fetisa*) Ha meizet ec'h eus en noz-se e oa ar priz a ranke bezañ paeet?

**Ar wreg:** O Doue, pardonit din, lavarit n'eo ket gwir! Lavarit ez on pardonet! O Doue, perak ne respontez ket? Perak ne rez ket d'ar soñjoù fall-se tevel?

**An droukspered (sioul-meurbet):** Te a gred e talv dit pediñ?

**Ar wreg (o c'hounit fiziañs):** "Ur bedenn a darzh er galon, bepred a dizho skouam Doue."

**An droukspered:** Evel-se e vez moulet el levr-kantikoù! Hogen, daoust ha selaouet eo bet bepred da bedenn? Biskoazh n'ec'h eus pedet en aner? Ha deut eo da vab dic'hloaz eus ar brezel? Ha selaouet eo bet da bedenn en noz-se m'edos o pediñ dirak an tan hanter varv evit ma tistroje da verc'h hep droug d'ar gêr?

**Ar wreg:** Kement a zo c'hoarvezet a zo mat!

**An droukspered:** Da dammig tiegezh n'en deus graet biskoazh berzh. Dimezet out gant ur paotr diot ha didalvez. Act eo peadra da gerent gant estrañjourien. Paour out bet bepred... Ha bremañ, n'eus ket ur gwenneg en ti, ha warc'hoazh eo Sul diwezhañ ar bloaz. (*Laouen*) Petra a lakai d'ar gest warc'hoazh.

**Ar wreg:** Emañ va fried e kêr. Arc'hant a dleer dezhañ eno.

**An droukspered:** Ur c'hozh votaouer mezv a dle dezhañ ur skoed! Da betra e talvezo dit ur skoed, ma c'hellez tapout anezhañ? Warc'hoazh n'ez pezo mann da reiñ. E kostez ar chapel e vi. Pep unan a c'hello da welout. Ar verourien binvidik ha marc'hadourien ar vourc'h a lakaio

bilhedoù. Ha neuze e teuy da dro... pep unan o sellout.

**Ar wreg:** Doue a gaso din arc'hant, marteze.

**An droukspered:** Ha neuze e lavarint a-vouezh-izel etrezo: "Pegen paour ez int! Ma n'eo ket un druez! M'o dije ur mab mat, a gasfe arc'hant dezho, e-lec'h..."

**Ar wreg:** N'hellont lavarout netra en e enep. Dre e fazi n'eo ket!

**An droukspered:** Klev! (*Paouez a ra ur pennadig*) Emañ da bried o tont en-dro... Emañ o tigeriñ ar gloued e traoñ ar porzh. Ha te a gred en deus un dra bennak evidout?

**Ar wreg:** Tad trugarezus, Roue Meur, selaou va fedenn! Evidout-Te eo em eus ezhomm eus an arc'hant... O Doue, kas dimp arc'hant, kas dimp arc'hant!

*An nor a zigor, hag an ozhac'h a zeu e-barzh. Dilhad Sul du ha kozh a zo gantañ, ul letern war enaou en e zorn. Kas a ra al letern a-dreuz ar gambr betek an oaled. Eno e laz ar goulou, hag e laka al letern war an douar.*

**An ozhac'h (rust):** Perak ec'h eus kaset ac'hanon... div lev ac'han, evit netra? Me am boa lavaret dit! Teñval eo an noz war ar marc'had... koulmoul du o kuzhat al loar.

**Ar wreg:** Gwelet ec'h eus ar botaouer?

**An ozhac'h:** N'edo ket en e stal, nag en e di, na war leur-gêr. E gavet em eus e tavarn al Leon Ruz, mezv-dall!

**Ar wreg:** Glebiet eo da chupenn. Laka da hini gozh en he lec'h.

*An ozhac'h a ya e-barzh ar gambr-wele war an tu dehou. Ar wreg, chomet hec'h-unan, a ziskouez holl c'hwerventez he c'herseenn. Teñvalaat a ra c'hoazh ar gambr.*

**An droukspered (goapaus):** Pelec'h emañ an arc'hant? Pelec'h emañ an Doue a respont ouzh da bedennou? (*Ar wreg a chom dilavar. Hi ivez en em c'houlenn pelec'h emañ. Kenderc'hel a ra*) "Leñv bremañ. Rak eñ a zo un doue. Emañ o komz, pe o vont war-lerc'h unan bennak, pe o veajiñ, pe kousket eo marteze, ha ret eo e zihuniñ."

**Ar wreg (d'an Neñv, en ur bedenn diwezhañ, birvidik ha leun a feiz):** O Aotrou, laz an touer-Doue-mañ! (*Chom a ra a-sav ur pennadig. An Droukspered a ziroll da c'hoarzhin skiltr.*)

**An droukspered:** Gwelout a rez, n'eus c'hoarvezet netra: emañ emañ c'hoazh! Da betra e talv da Zoue? Marteze n'eus ket a Zoue!

**Ar wreg:** "Er penn kentañ, Doue a grouas an Neñv hag an Douar."

**An droukspered:** Hag o vezañ ma oa un Doue madelezhus, e lakaas

ac'hanout war ar bed-mañ da labourat, da gaout glac'har, da gaout naon. Da zilezel a reas hep arc'hant, e kerzh ur mestr hudur. Lemel a reas da verc'h diganit. Da vab ne gav ket a labour. Ur pezh diot gwan, didalvez eo da bried. Ha bremañ n'ec'h eus ket ur gwenneq. Un Doue madelezhus, evit gwir! (*Gwidreüs-tre*) Er penn kentañ, Satan a grouas ar bed!

**Ar wreg (estlammet):** Satan?

**An droukspered:** Ya, Satan eo a ren ar bed. Diskrediñ a rez war se? pa'c'h eus ezhomm eus un dra bennak, goulenn digant Satan. "Ne vern petra a c'houlennot em anv a vezo roet deoc'h."

**Ar wreg:** Pediñ Satan?

**An droukspered:** Ya, pediñ Satan, evit ur wech. (*Tevel a reont. Emañ ar wreg o prederiañ don. Satan a c'hell tapout krog enni, rak kredet he doa en he fedenn da Zoue*) Gwelloc'h e vefe! Sofij, goullo e vo da zorn warc'hoazh en iliz, hag e teuy ar c'hester war-du ennout... Ha te a fell dit goulenn en e anv?

**Ar wreg (gwidreüs):** Roet e vezo?

**An droukspered:** Roet e vezo.

**Ar wreg:** Bremañ?

**An droukspered:** Diouzhtu. Ha te a fell dit goulenn en e anv?

*Ar wreg a zo douget d'hen ober da welout petra a c'hoarvezo. Plegañ a ra he fenn da ziskouez he deus asantet, hag e stag da bediñ. Dilavar e chomont. Neuze e teu an ozhac'h e-barzh ar gambr gant tizh. Kemmet en deus e chupenn.*

**An ozhac'h (fromet-holl):** Hon Aotrou Doue Israel ra vo meulet! E godell va chupenn gozh em eus kavet... ur skoed! Saveteet omp bremañ! (*Ar wreg a sell outañ, saouzanet*) Ac'hanta, perak ne lavarez grik? Doue en deus selaouet hor pedenn. Biken ne zouetin adarre, biken! Sell 'ta... iskis eo ar skoed-mañ... ur pezh-moneiz a vro estren, emichañs. Ur pezh-moneiz teuzet a-raok amzer ar rouanez kozh.

**Ar wreg (gant euzh):** Arc'hant an diaoul eo... Taol anezhañ pell diouzhit, taol anezhañ pell diouzhit, pa lavaran dit... O, daonet on! Pedet em eus Satan d'e gaout, ha selaouet on bet gantañ... O, petra ober, petra ober? Gwerzhzet em eus va ene d'an Diaoul... Gwerzhzet em eus va ene evit ur pezh-moneiz!

**An ozhac'h:** Teurel anezhañ pell diouzhit? Ne rin ket, va gwreg, ha Doue o paouez ober ur burzhud evidomp!

**Ar wreg:** N'eo ket gant Doue eo bet kaset: gant an Diaoul eo!



**An ozhac'h:** An Diaoul, a dra sur... Perak n'en em daolez ket war da zaoulin da drugarekaat an Aotrou evit E vadelezh vras? Biskoazh n'eo chomet ur wir bedenn hep respont. (*Pa gomz an ozhac'h eus Doue evel eus ur c'heneil, arabat bezañ souezhet. Doujus-bras e chom en E geñver, e gwirionez*) Trugarez, Aotrou, tennet ec'h eus ac'hanomp a-dre daouarn hon enebourien. Trugarez, tad madelezhus. Kae bremañ e peoc'h, servijer mat ha leal. N'ec'h eus ket kaset kalz dimp, hogen a-walc'h eo.

**Ar wreg:** Penaos gwalc'hiñ va ene diouzh ar pec'hed-mañ? Pec'hed em eus a-enep Doue... Devet e vo va ene en Ifern da virviken. Deviñ a rin er soufr hag en tan. Graet em eus an torfed n'hell ket bezañ pardonet. Pec'hed em eus a-enep ar Spered Glan.

**An ozhac'h:** Sot out, va gwreg, evel en amzer ar Mision bras! Bremañ omp dinec'h, ar skoed-mañ en deus saveteet ac'hanomp! Warc'hoazh ez aimp da glevout ar brezegenn, ha pa zeuy ar c'hester e lakain ar pezh-mañ er plad, evidomp hon-daou. Kompren a raint, ha neuze e lavarint: "Ur mab mat o deus, a c'hounez bara d'e dad ha d'e vamm."

**Ar wreg:** Arabat dit ober se! Penaos e c'hellfemp lakaat arc'hant an Diaoul e plad an iliz? Sofj ennon, em ene daonet, kollet da viken! An Diaoul en deus laeret va ene! Amañ eo bet, an holl abardaez, o touellañ ac'hanon... Ha ne welez ket anezhañ aze, er c'horn, o c'hoarzhin goap din?... O, petra 'rin-me? Kollet on! Va fried a vezo war barlenn Abraham, ha me o pediñ hag oc'h aspediñ da gaout un dakennig dour war va zeod. Rak eno e vo leñvadeg ha skriñnadeg-dent!

**An ozhac'h:** Foll out, va gwreg, n'eus ket a ziaoul aze. Ha mar deo an diaoul en deus kaset anezhañ dimp, daoust ha ne vo ket c'hoari un dro gaer dezhañ, lakaat ar pezh-arc'hant-mañ e plad an iliz? N'eo ket da ober droug ec'h eus goulennet anezhañ. Ezhomm az poa anezhañ da reifiñ da Zoue.

**Ar wreg:** Ezhomm hor boa anezhañ da vagañ hol lorc'hentez lous. Sede perak ne felle ket da Zoue selaou hor pedenn.

**An ozhac'h:** N'eus netra d'ober bremañ... nemet pediñ evidout. (*Plegañ a ra e benn.*)

**Ar wreg** (*o plegañ he fenn ivez*): Re ziweczhat eo bremañ da bediñ evidon.

*Mar c'hoarzhit o klevout ar bedenn gaer ha gwirion-mañ, e rankit*

*hen ober gant teneridigezh ha kengarantez.*

**An ozhac'h:** O Doue, n'on ket evit kompren petra 'c'hoari gant ar merc'hed-se. N'on ket. C'hwi a gompren, avat. C'hwi a gompren petra 'c'hoari ganto, gant pep unan anezho. Daskorit dezhi he skiant-vat... daskorit dezhi he skiant-vat, dre ar garantez a zougomp deoc'h, Aotrou. Evel-se bezet graet.

*Tevel a reont. Neuze e skoer ouzh an nor. Skrijañ a ra an ozhac'h hag ar wreg. Skeiñ a reer adarre. Neuze e sellont an eil ouzh egile. Un trede taol a glever. An ozhac'h, a oa daoulinet, a sav hag a ya d'an nor. Ar wreg a ya war e lerc'h. Ar c'hliked a sav, hag e-barzh e teu ur c'hlasker-bara. Kenedek hag eeun-meurbet e zremm. Ur vantell hir a zo en-dro dezhañ, hervez giz an divroidi. Kozh-kozh ha kabac'h eo.*

**Ar c'hlasker-bara:** Tud vat an ti-mañ, pell eo ac'han da gêr?

**An ozhac'h:** Ul lev... It gant an hent betek krec'h ar menez, ha neuze dre ar gloued en draonienn. Troit a-zehou pa viot degouezhet e-tal ar c'hraou-deñved, ha neuze kerzhit war-eeun betek an hent bras.

**Ar c'hlasker-bara:** Trugarez, mignon.

**Ar wreg** (*goude bezañ sellet pizh outañ*): Deuit e-barzh hag azevit e-tal an oaled da dommañ.

**Ar c'hlasker-bara:** Yen eo an noz.

*Dont a ra e-barzh hag azevit e kador-vrec'h ar wreg, he deus lakaet e-kichen an tan evitañ.*

**Ar wreg:** Dont a rit eus a bell?

**Ar c'hlasker-bara:** Eus a bell bras.

**Ar wreg:** Ha pell oc'h eus c'hoazh da vont?

**Ar c'hlasker-bara:** N'em eus ket.

**Ar wreg:** Ha karout a rafec'h debrifiñ un dra bennak?

**Ar c'hlasker-bara:** N'em eus ket naon.

**Ar wreg:** Sec'hed hoc'h eus marteze. Ha karout a rafec'h evañ ur banne laezh?

**Ar c'hlasker-bara:** Nann, n'em eus ket sec'hed. "Ne vevo ket an den diwar bara hepken, hogen diwar bep komz a zeuy diouzh genou Doue."

**Ar wreg:** Un den mat a zo ac'hanoc'h.

**An ozhac'h:** Anaout a ra e Vibl, da vihanañ.

**Ar c'hlasker-bara:** Nann, n'on ket un den mat.

**Ar wreg:** Anaout a rit, avat, komzoù hor Salver.

**Ar c'hlasker-bara:** Anaout a ran komzoù hor Salver. Dont a ran eus bro

hor Salver.

*Ar wreg (gant dudi):* Eus Palestina? Neuze, anaout a rit mor Galilea?

*Ar c'hlasker-bara:* Pesketaet em eus war mor Galilea.

*Ar wreg:* Bet oc'h e Nazarezh?

*Ar c'hlasker-bara:* Kerzhet em eus e-lec'h m'en deus c'hoariet hor Salver.

*Ar wreg:* Ha bet oc'h e Bezhleem?

*Ar c'hlasker-bara:* Bet on e-barzh ar c'hraou m'eo ganet.

*Ar wreg:* Ha gwelet oc'h eus ar prezeb?

*Ar c'hlasker-bara:* Gwelet em eus al loened o tebrñ er prezeb m'eo bet astennet.

*An ozhac'h:* N'eo ket gwir an dra-se. Savet ez eus bet un iliz a-us d'ar c'hraou, war am eus klevet gant ar baotred a zo bet du-hont e-pad ar brezel.

*Ar c'hlasker-bara:* Me oa eno, a-raok d'an iliz bezañ bet savet.

*Ar wreg:* Ha bet oc'h e Jeruzalem?

*Ar c'hlasker-bara:* Meur a wech.

*Ar wreg:* Hag e liorzh Jetsemani?

*Ar c'hlasker-bara (c'hwek-meurbet):* Hag e liorzh Jetsemani.

*Ar wreg:* Eno ez eo bet gwerzhet. Judaz a douellas anezhañ... evit arc'hant e touellas anezhañ.

*An ozhac'h:* Ya, bepred e lagad war ar yalc'h.

*Ar c'hlasker-bara:* Ur merour evezhiek oa.

*An ozhac'h:* N'eo ket evit se e reas an dra-se. Fellout a rae dezhañ kaout arc'hant.

*Ar wreg:* Gwerzhañ a reas hon Aotrou evit tregont pezh arc'hant.

*Ar c'hlasker-bara:* Tud 'zo o deus gwerzhet o ene evit nebeutoc'h.

*Ar wreg (saouzanet-trumm):* Gwerzhet o ene?

*Ar c'hlasker-bara:* Ya, gwerzhet o ene divarvel da Satan evit nebeutoc'h. Judaz, avat, a bedas Doue, ha Doue a bardonas dezhañ.

*Ar wreg (buan):* Emañ er Baradoz neuze?

*Ar c'hlasker-bara:* Nann, n'emañ ket er Baradoz.

*An ozhac'h:* Emañ en Ifern?

*Ar c'hlasker-bara:* Nann, n'emañ ket en Ifern... Emañ oc'h ober pinijenn.

*An ozhac'h:* Oc'h ober pinijenn?

*Ar c'hlasker-bara:* Ya, emañ c'hoazh o kantren war an douar...

*Ar wreg (o troc'hañ e gomz dezhañ):* Doue en deus gallet pardonñ da

Judaz?

*Ar c'hlasker-bara:* Ya, da Judaz ha d'an holl bec'herien gaezh: "ho pec'hedoù, hag i ruz, a vezo gwennoc'h eget an erc'h".

*Ar wreg:* Klevet em eus en deus bet Judaz keuz d'e bec'hed. Degaset en deus da Zoue priz e drubarderezh. Taolet en deus an tregont pezh arc'hant war leur an templ.

*Ar c'hlasker-bara:* Ya, ha skignet int bet ac'hano dre bevar c'horn an douar, ha kalz droug o deus graet abaoe. (*Tevel a reont holl.*)

*An ozhac'h:* Peseurt pinijenn a ra Judaz neuze?

*Ar c'hlasker-bara:* Emañ o kantren war an douar, skuizh-meurbet. (*Tevel a ra*) Emañ o klask an tregont pezh arc'hant m'en deus gwerzhet e vestr evito.

*Ar wreg:* Ha kavet en deus anezho?

*Ar c'hlasker-bara:* O c'havet en deus holl, nemet an tregontvet.

*Ar wreg:* Ha p'en devo kavet hennezh?

*Ar c'hlasker-bara (gant levenez):* Neuze e tigor ar c'houmoul, ha degemeret e vo er Baradoz en diwezh.

*An ozhac'h:* Brav eo ar marvailh-se... hogen n'eo ket gwir.

*Ar c'hlasker-bara (o sevel):* Tud vat, diskuizhet on bremañ, ha ret eo din mont.

*Ar wreg:* E pelec'h e kouskot fenoz?

*Ar c'hlasker-bara:* Doue a bled gant ar golveni. Daoust ha ne blede ket ganin?

*Ar wreg:* Yen eo an noz; n'hellit ket kousket war an douar.

*Ar c'hlasker-bara:* Meur a wech n'en deus ket bet hor Salver a lec'h da lakaat e benn. (*Emañ bremañ e-kichen an nor.*)

*Ar wreg (a-daol-trumm, o kregiñ er skoed a zo chomet war an daol):* Kemerit an arc'hant-mañ, va den mat. N'eo ket kalz, hogen a-walc'h e vo deoc'h da gaout peadra da zebrñ hag ul lec'h da gousket.

*An ozhac'h:* Petra 'rez? Arabat dit dispign evel-se an arc'hant roet gant Doue.

*Ar wreg:* Ha te a c'hellfe lakaat an arc'hant-mañ er plad warc'hoazh, ha soñjal ez eo marvet an den santel-mañ marteze gant ar yenijenn war ar menez?... Kemerit an arc'hant-mañ, va den mat, ha bennozh Doue gantañ. Ha fellout a ra deoc'h kemer al letern?

*Ar c'hlasker-bara a sell ouzh ar pezh-moneiz ur pennadig; neuze ur sell a laouenidigezh a bar war e zrenn.*

*Ar c'hlasker-bara (e barr al levenez):* Nann, n'em bo ket ezhomm a

Ietern war va hent! (*Chom a ra a-sav e toull an nor, troet war-du ar gambr*) Tud vat, emaac'h tost ouzh an Nefiv! Bennozh Doue war an ti-mañ!... Ha ne rofec'h ket ho pennozh d'ur beajour skuizh, a vo echu emberr e veaj?

**Ar wreg:** Ne ouzomp ket penaos reiñ deoc'h hor bennozh. Mar kirit e pedimp evidoc'h.

**Ar c'hlasker-bara:** Ya, pedit evidon.

*An ozhac'h hag ar wreg a zaoulin. Ar c'hlasker-bara a dro e benn war-du ar gambr, ha neuze e c'hoarvez un dra souezhus. Ar sklerijenn a zo en-dro dezhañ a gresk, ha kemmet eo a-grenn. Ur sked doueel a bar a-dreuz d'e zremm. Neuze e steuz dre an nor. Raktal e paouez an ozhac'h a bediñ, hag e kemer mantell ar c'hlasker-bara, bet lezet gant hemañ war ar gador.*

**An ozhac'h:** Sell 'ta, lezel en deus e vantell.

**Ar wreg:** Kae buan war e lerc'h.

*An ozhac'h a ya er-maez. Ul luc'hedenn a darzh trumm. Ur pennad mat a amzer a dremen. Neuze e tistro an ozhac'h, strafuilhet-bras. Ar vantell a zo gantañ c'hoazh.*

**Ar wreg:** N'ec'h eus ket e gavet?

**An ozhac'h (goustad, evel treantet):** N'oan ket evit e welout neblec'h. Hogen, p'edon o vont er-maez, ar c'houmoul a voe roget e daou, hag e tarzhas ur wezenn vras betek an oabl. (*O sellout ouzh ar vantell*) Daoust ha ne oa ket Eliaz?

**Ar wreg:** "Echu emberr e vo va beaj," emezañ. "N'eus nemet an tregontvet pezh arc'hant n'en doa ket kavet," emezañ. Klevet ec'h eus?

**An ozhac'h:** Daoust ha ne oa ket... Judaz?

**Ar wreg:** Ur c'hannad a-berzh Doue e oa, kaset gant Doue da salviñ va ene din. (*Gant ar gantol ez a betek ar c'horn ma komze an Droukspered; n'eus netra eno*) Gwelout a rez, n'eus netra amañ bremañ! Aet eo kuit!

*Ar gambr a zo bremañ leun a sklerijenn.*

(Embannet evit ar wech kentañ e *Gwalarn*, Hañv 1925 hag un eil gwech e *Gwalarn*, niv. 136-137.)

## Nevez-Amzer

T.C. Murray

## TUD AR C'HOARI

Andrev, un den kozh  
Jani, e c'hoar, oadet-bras ivez  
Jalm, e vab  
Yola, gwreg e vab  
Nora, o merc'h

Un ti-soul e-kreiz ar geunioù en ur c'hornad digenvez, e kreisteiz bro Mumha, en Iwerzhon. Diabarzh ur vereuri. Dre an nor digor e traoñ ar c'hoarilec'h e c'heller merzout ur park nevez-aret, hag an ambrioù o c'hlasaat ouzh heol an nevez-amzer. Pelloc'h, un dachennad segal o paouez dont er-maez eus an douar, glas lintrus e-keñver an irvi. Un nor all a-zehou, o kas d'ur gambr-wele. Ar siminal bras, a-c' hiz-kozh, a zo diouzh an hevelep tu. A-gleiz, ur skeul da bignat d'ur gambr all war laez. Mogerioù ar gambr vras, bet razet gwechall, a zo aet melen, liv ar c'hoaven. An dour, o strilhañ diouzh soul glebiet an doenn, en deus graet, amañ hag ahont, roudennoù gell warno. An arrebeuri a zo dister, — div vabor vroen, ur bank kozh, un daol hag ur ganastell. En ur c'horn emañ klud ar yer, ha war bardell ar prenestr ez eus ur volenn leun a vleuñv nevez.

Andrev, un den kozh-kozh, gwisket gant ur chupenn damzu, bragoù voulouz, ha loeroù stamm glaswenn, a zo azezet o vutuniñ e-tal an tan. Glac' harus hag iskis war un dro eo gwelout an den kozh-se, gant e gorf daougrommet hag e zremm sioul diamzeret.

Ur skeud du a dorr goulou an heol. Jani en em ziskouez hag a zeu tre. Hi ivez a zo kozh-kozh evel he breur. Pa denn he c'habell, avat, e veizer ez eo-hi unan eus ar re-se a ra fae, koulz lavaret, war an oad. N'eo ket digened kennebeut, gant he c'horf sonn, hag he dremm wenn dindan he c'hoef krizet.

**Andrev** (*gwan-meurbet, o sevel*): Te eo, Jani?

**Jani**: Me eo, Andrev. Penaos ez a ar bed ganit en deizioù-mañ?

**Andrev**: Ma! n'em eus ket da glemm. Laouen on, peogwir ez eo tremenet ar gañv en diwezh.

**Jani**: Ha laouen eo pep unan, yaouank ha kozh.

**Andrev**: N'eo ket souezhus, me 'lavar, ken kalet ha garv eo bet ar goañv. Hogen an heol a zo madelezhus bremañ, Doue ra vo meulet. Ha te a fell dit dont da ziskuizhañ ur pennad?

**Jani** (*o tennañ he c'habell*): Pounner eo ar c'habell-mañ pa vez tomm an amzer.

**Andrev**: Sell 'ta. Troc'het eo da alan.

**Jani**: Prim e teuomp da skuizhañ, ha ni tremen tri-ugent vloaz.

**Andrev**: A zo gwir, — ha koulskoude, un amzer a zo bet, Jani, ha ne gav ket din ez eus re bell c'hoazh, pa lakaes ac'hanomp holl da c'hoarzhin, peogwir oas ken krefiv hag ur gwaz.

**Jani** (*oc'h azezañ*): Yec'hed am boa neuze, Doue ra vo meulet. Yec'hed mat, Andrev. Hag e c'hellen choukata ur boutegad mouded kenkoulz hag ur vaouez paour he zammig bugel en he frileuzenn.

**Andrev**: O, traoù souezhusoc'h c'hoazh ac'h eus graet. Ouzhpenn ur wech ha div wech em eus da welet o pignat gant ar skeul, da gas ar sac'had brenn hag ar sac'had bleud war laez, ha te keit-all o kanañ.

**Jani** (*o hejañ he fenn*): An dra-se am eus graet, — kant gwech.

**Andrev**: Ur vrav a blac'h e oas neuze, Jani, — ur vrav a blac'h.

**Jani**: Ne vijen ket bet evit krediñ, Andrev, e vije tenn din un deiz ober ar pennadig hent a zo etre an iliz hag ar gêr hep dont amañ da chanañ.

**Andrev**: Souezhus eo gwelout pegen buan e tec'h ar bloavezhioù pell diouzhimp. Dec'h e oamp bugale, leun a vuhez evel an ebeulien yaouank o lammad tro-dro d'ar parkeier. Hag hiziv ez omp brevet. Da gofez out bet du-hont, moarvat.

**Jani**: Bet on da zibunañ va istor d'ar beleg.

**Andrev**: Ar beleg yaouank e oa?

**Jani**: Ya, ha mil bennozh Doue dezhañ.

**Andrev**: Meuleudi a vez graet dezhañ gant an holl, ma'z eo ur souezh.

**Jani**: Un den mat eo. Edo dirak dor an iliz, ha me o tont, bec'h warnon o krapañ gant an dorgenn. Skuizh e oan da welout, me 'gred, rak hennezh en deus lavaret din: "Re denn eo deoc'h, moereb," emezañ,

"ober an hent penn-da-benn da zont betek amañ." "Ne ran forzh, Aotrou," emezon. "Ouzhpenn un hanterlev," emezañ, "ha c'hwi brevet gant ar gozhni!" "An dra-se n'eo netra," emezon, "rak daoust pegen kozh ez on, an aotrou Doue en deus lezet c'hoazh trawalc'h a nerzh ganin da vale."

**Andrev**: Mat ec'h eus komzet.

**Jani**: "Ha goude m'ho pefe div wech pe teir gwech muioc'h a nerzh," emezañ, "un druez e vefe e foranañ."

**Andrev**: Setu aze komzoù brav.

**Jani**: Gortoz, ma lavar in dit. "Arabat deoc'h kemer poan adarre d'ober an hent-se," emezañ, o lakaat e zorn binniget war va skoaz. "Keit ha ma vin er barrez-mañ ez in war va marc'h-houam da gas deoc'h ar Sakramant Santel, ne vem pe en deiz pe en noz e vo."

**Andrev**: Un den santel eo hennezh, p'en deus lavaret an dra-se.

**Jani**: Klev 'ta, Andrev, ne oan ket evit fiftival va zeod, ken hegarat e komze din. N'em eus gelllet respont netra, nemet: "Bennozh deoc'h, Aotrou".

**Andrev**: An estrenien a vez gwelloc'h alies eget hon tud, Jani.

**Jani**: Hon tud! Hon tud n'o deus ket ezhomm ac'hanomp, Andrev. Tamall a reont dimp an deizioù buhez a vez roet dimp gant Doue. Tamall a reont dimp an tammig bara a vir ennomp ar vuhez.

**Andrev**: Gwir eo. Un druez eo bevañ pa vez an dud skuizh ganeoc'h.

**Jani** (*dichek*): Ha perak e vefent skuizh ganeoc'h? Me a garfe gouzout perak.

**Andrev**: Da biv ha da betra omp mat bremañ, ma'z eo hogos echu hor buhez?

**Jani**: Petra 'lavarez? Lavar din bremañ. Ne dremen ket un devezh, kozh evel ma'z out, hep ma rafes un tammig labour bennak evit tud an timañ!

**Andrev**: N'hellan ket ober kalz, Jani. Sell! dec'h da noz, p'edon o vesa an defived, ur barrad-glav a zo kouezhet trumm war an dorgenn. Kridienn ar marv a zo bet em eskem abaoe.

**Jani** (*un tammig droug enni*): Me 'lavar n'eo ket brav da'z mab lakaat e dad da vesa an defived.

**Andrev**: N'eus netra da damall dezhañ. Me eo a felle din mont. Pa zeu an nevez-amzer e karan bezañ en heol. Kaer eo, pep tra o vrofisañ. C'hwez an douar digoret hag ar plant o kreskiñ a zo mat ivez.

**Jani**: Ma, evel ma lavarer, keit ha ma c'heller en em stlejañ ez eo gwelloc'h bezañ dindan an oabl. Ar re a zo e-barzh ospitalioù ha tiez

evit ar re gozh a rofe o daoulagad da vont da vale er parkeier.

**Andrev:** Sur e rafent, paour kaezh tud. War am eus klevet, ar re a zo bet boazet d'ar c'hêrioù ne reont ket kalz a van, hogen ar re diwar ar maez n'int morse eürus eno, — atav o kaout keuz d'ar maezioù.

**Jani:** Ne lavarint ket nann. Gwell e ve ganin mont da glask va zammig kreun war an hent bras eus an eil penn d'ar bloaz d'egile eget chom etre ar mogerioù-se. (*O komz eus traoù all*) Ma, ro din da loeroù. O didoullañ a c'hellin, e-pad ma vin o tiskuizhañ. Gwall doulet int, moarvat.

**Andrev** (*o sevel hag o vont da gerc'hat al loeroù*): Roget eo bet unan gant un draenn en deiz all.

**Jani** (*o sellout tro-dro*): Mes pelec'h emañ maouez an ti-mañ? N'em eus ket he gwelet, na Jalm kennebeut, pa edon o tont amañ.

**Andrev:** E kêr emaint abaoe mintin-mañ abred. Un tammig amann fresk he doa Yola da werzhañ.

**Jani** (*izeloc'h*): Lavar din, penaos eo bremañ?

**Andrev:** Da lavarout gwir, evel-evel.

**Jani:** Atav ken fall evidout?

**Andrev:** Gwashoc'h, Jani, gwashoc'h.

**Jani:** Siwazh dit! Doue r'en devo truez ouzhit, bremañ e fin da vuhez.

**Andrev:** Un dra bennak a zo o treiñ en he spered diwar va fenn. Un dra bennak hag a fell dezhi ober, a gredan: "Pell a-walc'h em eus ho kwelet, kluchet dalc'hmat e-tan an tan," emezi din en abardaez all, pa oa aet droug enni adarre.

**Jani** (*gant kounnar*): An dra-se he deus lavaret dit?

**Andrev:** Ar c'homzoù-se a zo bet o pouezañ war va spered abaoe.

**Jani:** Ur vaouez fall eo hounnezh, — ur vaouez fall, Doue r'hen devo truez ouzhin.

**Andrev:** Daoust d'ar pezh am eus lavaret dit, n'em eus ket nemeur a dra da damall dezhi koulskoude.

**Jani** (*taer*): Ha perak n'ez pije netra da damall dezhi? Perak? Erru kozh e vo un deiz, Doue d'en devo truez outi.

**Andrev:** Hounnezh ne vo biken kozh. Emañ o vont trumm d'ar vered, war-bouez en em chalafañ gant ar bed.

**Jani:** Truez Doue ouzh va ene! Biskoazh n'em eus kare gwreg da vab, diwar an deiz kentañ zoken ma paras warni ma daoulagad.

**Andrev:** Mat e oa gwechall, Jani, — mat ha karantezus. Mes ugent vloaz o poaniañ da sevel bugale en ul lastez mereuri e-kreiz ar menezioù,

evel ma lavar hec'h-unan, a lakafe ne vern piv da zont kintus en diwezh.

**Jani:** Gant ar re all marteze. Hogen gant Jalm ha ganit-te, ha te ken sioul hag ur bod-spern en abardaez! N'he deus netra da glemm. Kollet eo bet, dre forzh bezañ lezet d'ober he fenn.

**Andrev:** Nebeut a vad a vez graet gant komzoù garv, Jani.

**Jani:** Ma, n'ouzon ket, — n'ouzon ket. A-wechoù ez eo mat bezañ sioul, hogen fall eo ivez lezel an dud d'ho kwaskañ, ha chom mut an holl amzer. Tamall a ran kalz muioc'h, evelato, da'z mab eget d'e wreg: ur vezh eo dezhañ, Andrev, — ur vezh!

**Andrev:** Ur galon vat a vab en deus, Jani.

**Jani:** N'en deus ket, avat! N'en deus ket! Pebezh kalon, lezel tud d'ober gaou ouzh e dad, dirazañ!

**Andrev:** N'eo ket kiriek da se.

**Jani:** N'eo ket kiriek? — penaos 'ta?

**Andrev:** Buanek eo e wreg. Bep gwech ma tigor e c'henou, ne dalv nemet da greskiñ c'hoazh he c'hounnar.

**Jani:** Ha goude? E dad a zo e dad atav. Lavar din, ur greunenn vara sec'h a roont dit c'hoazh gant an te?

**Andrev:** Paour ez int, e gwir, paour ez int.

**Jani:** N'eo ket gant un tammig amann e vefent lakaet kalz paouroc'h.

**Andrev:** Ne ran forzh. Ma c'heller tremen hep amann e-pad amzer goraiz, e c'heller ober kemend-all goude.

**Jani:** Mes amann o deus evito, emichañs, — hag e-leizh?

**Andrev:** Va Doue, ezhomm o deus, Jani. Labourat a reont kalet eus ar mintin betek an noz, ha dindan ar seizh amzer. Ha petra 'ran-me, nemet mesa an defived ur wech ar mare, pe mont da vale gant ar vugaligoù er parkeier.

**Jani:** Soublañ a rez da gein da bep taol, ha morse ur ger ganit! Laouen out da vezañ lezet da vevañ ha da sellout ouzh an heol.

**Andrev:** Peoc'h, peoc'h, Jani. Mat on evel-se. Unan evelton n'en deus ket ezhomm a galz da vevañ.

**Jani:** Ur vezh eo! Ha ne ven ket pell o lavarout se da Yola, ma teufe amañ diouzhtu.

**Andrev** (*nec'het*): En anv Doue!...

**Jani:** Hag e rafen!

**Andrev:** Nann, Jani, — ne ve da dit lakaat tabut da sevel. A-walc'h a c'hwervoni a zo c'hoazh en ti-mañ.

**Jani:** O, n'on ket evit padout, ha te atav o plegañ! Mes gortozit un den pevar-ugent vloaz da cheñch menoz!

**Andrev:** Gwelloc'h eo chom sioul, — chom sioul atav, evel ma lavarer. Setu aze un dra a zo bet desket dit gant ar bloavezhioù.

**Jani:** N'o deus ket desket dit ar wirionez neuze. Ha ne vimp ket sioul a-walc'h er vered? Koll amzer eo, avat, klask arguziñ gant un den kozh!

**Andrev (o c'hoarzhin goustadik):** Pa gant ur vaouez kozh, Jani!

**Jani:** Ur vaouez a ya war furaat gant an oad. Mes poent eo din loc'hañ. (O sevel, bec' hwarni) Sonn e teu va divesker pa choman o tiskuizhañ ur pennad.

*Renkañ a ra al loeroù.*

**Andrev:** Mont a rin d'ober ur pennadig hent ganit. Ret eo din kas an ein bihan war ar geot fresk, e park ar c'hreisteiz. Mat e vint a-benn foar gouel Mikael, a lavar Jalm.

**Jani:** Einigoù brav ez int, hag o tont mat, daoust pegen yen ez eo amañ. Taolet em eus pled outo o tont. N'ec'h eus ket aon da vont er-maez, goude ar barrad-glav ac'h eus paket dec'h?

**Andrev:** Tomm eo er-maez. An nevez-amzer a zo deut hiziv a-zevri. Klev! Un alc'hweder eo, moarvat, o kanañ!

*Geiz c'hwek ul labous a glever.*

**Jani (o selaou ur pennad):** N'ouzon ket. Kalet eo va divskouarn... Bez' ez eus ul labousig bennak o richanañ, pe marteze eo ar pofisined du-hont er porzh.

*Mont a ra da gerc' hat he mantell. He c'hemer a ra diwar an tach, hag he gwiskañ gant evezh bras.*

**Andrev (e toull an nor):** Tomm eo an heol, ha lintrus. Sell 'ta ouzh an irvi ruz o tont glas gant ar wrez.

**Jani:** Ya, un devezh kaer eo. Doue ra vo meulet. Gwelout an traoù o kreskiñ a c'hellfed, koulz lavaret.

**Andrev (o termal):** Marteze e ri goap ouzhin, Jani; mes kavout a ra din alies... e vin galvet da Zoue e-pad an nevez-amzer... Kerse e ve ganin mont neuze. Rak neuze e c'hoarvez ganin un dra souezhus-kenañ. Strafuih an douar o silañ em gwad emichañs.

**Jani:** An nevez-amzer, a lavarer, a sil un tammig e gwad pep unan, yaouank ha kozh. Hogen, pec'hed e vefe komz eus ar marv un devezh evel hemañ.

**Andrev (o kenderc' hel gant e soñj):** Ha te a garfe, Jani, mervel e-pad an

nevez-amzer?

**Jani (dibreder):** Ma, Andrev, morse n'on bet chalet gant se. Ha perak mont d'en em chalañ? Daoust ha ne vo ket an nevez-amzer hag an hañv atav, en tu all, — hañv ha nevez-amzer da viken?

**Andrev:** Gwir eo, Jani (*seder e teu e zremm*), — setu aze ur brav a soñj, — hañv ha nevez-amzer da viken!

*Mont a reont er-maez goustadik. Emañ geiz fresk an evn o leuniañ an ec'honder. Ur pennad goude, Yola a zeu tre. Ur frileuzenn bounner, lieslivek, gant ur pempilh, hogos a c'hiz reterel he deus. Emañ o tougen ur baner karget a bakadoù. Ur vaouez treut ha brevet ez eo, c'hwervoni pe didouellidigezh damverket war he dremm. Jalm a zeu war he lerc'h, gantañ ur sac'hig bleud kerc'h. Yola a laka he faner war an daol, a denn he frileuzenn hag a laka anezhi e pign ouzh un tach e penn ar ganastell. Mont a ra war-du an oaled.*

**Yola:** Doue binniget! Marv eo an tan! Ma, an den kozh-se a lakafe ur sant da vont e kounnar!

**Jalm (o klask habaskaat e wreg):** Kae da zresañ an daol, ha me a raio war-dro an tan. A-benn ur munud e vo ruz.

**Yola:** 'C'h eus ket ezhomm! Ma n'en dije ket gallet bezañ fin a-walc'h da deurel un nebeut mouded war an oaled p'edomp er-maez!

**Jalm:** Ken brav e oa an heol m'en deus bet c'hoant da vont kuit, marteze. Ha lavaret em boa dezhañ kas an ein war an dachennig geot fresk.

**Yola:** Se eo a vire outañ da ober war-dro an tan? Heug am bez pa'z kwelan atav prest da glask digareziou evitañ.

**Jalm:** E gwir, Yola, ne ran ket. Hogen dimp-ni holl e c'hoarvez ankounac'haat a-wechoù tra pe dra.

**Yola (o vezañ troñset he lostenn gant evezh, ha diskouezet ur vrozh ruz-bev, a zaoulin hag a c'hwezh war ur voundenn)** Ne c'hoarvez ket dezhañ en em ankounac'haat e-unan, 'c'h eus ket aon da gaout. (O c'hwezhañ war an tan) Teir gwech em eus klevet anezhañ ar mintin-mañ o hopal p'edomp o vont kuit gant ar c'harr e oa arabat dit disoñjal kas dezhañ e bakad butun. (O c'hwezhañ adarre.)

**Jalm:** Ma! E gom-butun a zo boued hag evach d'un den kozh.

**Yola:** Bez' e c'hellfe tremen hep butun. (O c'hwezhañ atav.)

**Jalm:** N'hellfe ket, Yola.

**Yola:** Meur a hini all gwelloc'h egetañ a dremen hep butun, — hag e reont. (An tan a varv) Sell! Marv eo an tan!

**Jalm:** Me 'zo o vont d'e lakaat da gregiñ.

**Yola** (*droug enni*): Lez an tan-se! Lez an tan-se! Ha bremañ ar vugale a vo o tont eus ar skol, ha netra dirazo nemet un oaled du hag un tammig bara sec'h da goan. An den kozh-se ne soñj en hini ebet nemetañ.

**Jalm** (*o terriñ keuneud*): Evelato, Yola! 'C'h eus ket ezhomm da vezañ ken diskiant-se.

**Yola**: Diskiant? Da betra e talv din komz, avat! Ma lakafe an tan en ti-mañ, ne gavfes netra da damall dezhañ c'hoazh.

**Jalm**: Va zad eo.

**Yola**: O, atav "va zad, va zad, va zad". Skuizh on ouzh e welout aze, eus an eil penn d'ar goañv d'egile, morgousket e-tal an tan.

**Jalm**: Ne ra ket a zroug, sur.

**Yola** (*buan*): A-walc'h am eus klevet diwar e benn.

**Jalm**: Bremañ ma teu brav an amzer, ha m'hon eus kement a labour war ar maez, eürus e vimp alies d'e gaout, moarvat.

**Yola**: Ya sur, eürus-meurbet!

**Jalm**: Ha ne c'hall ket diwall ar saout hag an defived? Ha goude, pa vo ar brini o laerezh...

**Yola**: O, un teñzor a zen e ve hennezh ne vem e pe di, n'eus ket da lavarout nann, — un den diot n'hall ket mirout an tan war enaou pe lakaat dour da virviñ a-benn distro ar re a zo war an hent abaoe tarzhan-deiz.

*Rimiañ a ra un nebeut alumetez, a lintr hag a varv diouzhtu.*

**Jalm** (*o klask difenn e dad*): O soñjal e oa marteze...

**Yola** (*o sevel*): A-walc'h am eus klevet diwar e benn, pa lavaran dit. Sell! Pa soñjan ennañ, hetiañ a ran a-wechoù, Doue da gaout truez ouzhin...

*Paouez a ra, hegaset.*

**Jalm**: Petra 'lavarez?

**Yola**: Peoc'h! Netra.

**Jalm**: Ur vezh eo dit komz e-giz-se, Yola, — ur vezh ez eo.

**Yola**: Ur vezh?

**Jalm**: Ur vezh eo kavout abeg gant an den-se, — ur gwir sant a zen n'en deus biskoazh graet droug da hini ebet. Va zad eo, ha, — ne fell ket din e komzfes evel-se.

*Yola a c'hoarzh.*

**Jalm**: Ne fell ket din, a lavaran.

*Yola a hej he skoaz gant dismegañs.*

**Jalm**: C'hoarzhin a c'hellez kement ha ma kari. Hogen ne c'houzañvin mui an dra-se. Gwad an den-se eo a red em gwazhied, ha n'hellan ket lezel unan bennak d'ober gaou da'm zad bemdez.

**Yola** (*o pouezañ war he c'homzoù*): Neuze, ar pezh a ran ne blij ket dit?

**Jalm**: Nann, ne blij ket din, — ar pezh a rez da'm zad da vihanañ.

**Yola**: Da dad!... Daou vloaz warn-ugent on bet o labourat evidout evel ur sklavez, er c'hoz palud-mañ, — daou vloaz warn-ugent hiziv endeeun, o lakaat bugale war an douar hag o sevel bugale, — hep ehan nag astal eus ar mintin betek an noz, — ha bremañ, ar pezh a ran ne blij ket dit!

**Jalm** (*pennek*): Ne blij ket din ar pezh a rez d'an den kozh.

**Yola**: Ne blij ket dit! Sell! P'on deut en ti-mañ, ne oan nemet un tammig plac'h o tont eus ar skol. Ha sell ouzhin bremañ, da zaou-ugent vloaz.

**Jalm**: Yola...

**Yola**: Sell ouzhin! (*Stanket e teu he c'horzailhenn*) Ur vaouez kozh brevet ha c'hwerv ha skuizh gant pep tra, — ha ne blij ket dit...

**Jalm** (*o klask en em zigareziñ*): N'em eus ket lavaret e...

**Yola**: N'eo ket a-walc'h bezañ bet poan ha bezañ breset va c'horf o labourat evidout ha da seizh bugel, bremañ...

**Jalm**: Yola...

**Yola**: Bremañ e rankan mont war va daoulin dirak da dad, (*Hogos o tifronkañ*) Daoust ha n'eo ket a-walc'h da zirenkañ spered ur vaouez kozh?

**Jalm** (*glac'haret*): Chom peoc'h gant an dra-se.

**Yola**: Ur glaskerez-vara a zo kant gwech eürusoc'h.

**Jalm**: Ma, ma, an aotrou Doue r'en devo truez ouzhip. (*Hegaral*) Ha zoken, n'en deus ket an den kozh meur a vloaz c'hoazh da vevañ, ha daoust pegen kalet eo deomp ober hon treuz en ti-mañ, n'eo ket gantañ ez eo kalz pounneroc'h ar samm.

**Yola**: Pounneroc'h eo evelkent kaout unan ouzhpenn e-lec'h ma'z eus seizh bugel da vagañ, ha gweneg ebet a re da zispign. (*O strinkañ he daeroù diouzh he daoulagad*) Ne rez forzh avat, nag eñ kennebeut, peogwir hoc'h eus ur paour kaezh diodez da boaniañ evidoc'h.

**Jalm**: N'eo ket gwir, Yola, n'eo ket gwir. Mes un amzer a zeuio ma vo da dimp gwelout hor bugale o kaout soñj ac'hanomp. Ar re gozh a rank bevañ ivez.

**Yola**: Ma rankont bevañ, n'eo ket e-lec'h ma'z eus un tiad leun a vugale.

**Jalm**: Ha petra 'vem? — petra 'vem, peogwir ez eo ken mat evito, — hag



i oc'h ober kement a stad anezhañ?

**Yola (trenk):** Ya, evel o zad, oc'h ober muioc'h a stad anezhañ eget eus ar vamm he deus o ganet.

**Jalm:** N'eo ket gwir, Yola.

**Yola:** N'eo ket gwir? Ha n'em eus ket daoulagad da welout? N'on ket dall emichañs!

**Jalm:** N'eus netra da damall dezhañ abalamour da se.

**Yola:** Pe ez eus un dra bennak da damall dezhañ pe n'eus ket, — an dra-se ne dle ket bezañ. N'eus ket ezhomm anezhañ en ti-mañ.

**Jalm:** Ha da belec'h ez afe?

**Yola:** Meur a lec'h a zo.

**Jalm:** Meur a lec'h? Hufivreal a rez emichañs!

**Yola:** Bez' ez eus ospitalioù evit ar re gozh.

**Jalm (broudet):** Petra 'lavarez?

**Yola (dichek):** Ouzhpenn unan gwelloc'h egetañ a zo aet d'an ospital.

**Jalm:** Mar deo gwir, Doue da gaout truez outo neuze! Maen ebet ne voe lakaet war an ti-se evit va zad.

**Yola (drougenni):** Ha n'int ket mat eno? Ur gwele tomm o deus, hag eno ne gouezh ket ar glav a-dreuz soul brein an doenn evel amañ.

**Jalm:** N'eus forzh. An taol dismegañs-se ne vo ket graet da'm zad endra vevin.

**Yola:** Un taol dismegañs! An ti-se a zo dereat evitañ. Ma vefe en ospital, e vefe leanezed da ober war e dro.

**Jalm:** Tarzhañ a rafe e galon etre ar mogerioù uhel-se.

**Yola:** Boazet e teufe gant an amzer, evel re all gwelloc'h egetañ.

**Jalm:** Goude pevar-ugent vloaz war ar maez! Biken, a lavaran dit. Biken.

**Yola:** Sell 'ta, Tagd Murphy gozh, ha Donal Hugh, — ha tad Diarmuid Owen.

**Jalm (kounnaret):** Ne ran forzh eus Tagd Murphy, nag eus Donal Hugh, — nag eus hini ebet an dud reuzeudik-se.

**Yola:** Nann, ne rez ket. N'eus nemet un dra a garez, gwelout da wreg o labourat hag o c'hweziñ a-hed an deiz...

**Jalm:** N'eo ket gwir!... Gouzout a rez n'eo ket gwir. (*O koll e vouezh*) Doue a oar ez on skuizh gant ar bed-mañ me va-unan, — skuizh hag ouzhpenn marteze.

**Yola (gwidreüs):** Ma'z afe da dad kuit, eürusoc'h e vefemp holl. Piv 'oar? Ur vuhez nevez e ve marteze evidomp.

**Jalm:** N'hor befe morse a chañs... ne vefen ket gouest d'hen ober, Yola.

**Yola (o pouezañ war he c'homzoù):** Ret e vo dit, Jalm, koulskoude.

**Jalm (nec'het):** Nann. Mervel a rafe, netra nemet o soñjal e rank mont kuit.

**Yola:** Neuze e vo gwelet. Ma ne da ket kuit eus da di, da wreg a yelo.

**Jalm (sebezet):** Petra 'lavarez?

**Yola:** N'eus ket da dermal, — unan ac'hanomp a yelo.

**Jalm:** N'out ket mat, sur?

**Yola (start):** Unan ac'hanomp, an eil pe egile, a lavaran.

**Jalm:** Te a fell dit ober mezh dimp ha dit da-unan dirak an holl?

**Yola:** Lavaret em eus.

**Jalm:** Yola, en anv Doue!

**Yola:** Gwir eo, hag hen touiñ a ran. Ne chomin ket gant an den kozh-se dindan an hevelep toenn. Va ger diwezhañ eo. Dalc'h soñj bremañ.

*Yola a ya er gambr e-kichen, en ur stlakañ an nor war he lerc'h. Gwall strafuilhet eo Jalm. Mont a ra d' an oaled ha teurel warni tammoù arskloed ruz. Flammoù a grog raktal er rousin a zo enno. Ur pennad goude, Andrev en em ziskouez war an treuzoù. Nec'het eo.*

**Andrev:** Jalm, va mab, pebezh darvoud fall a zo c'hoarvezet!

**Jalm (o treiñ):** O, te eo? Petra a zo c'hoarvezet?

**Andrev:** Unan eus an ein bihan a zo gloazet.

**Jalm:** Penaos 'ta?

**Andrev:** Edont o peuriñ en dachennig vihan war an dorgenn en tu all d'ar pufis pa lammas ur c'hi estren dreist ar c'hleuz rag-eeun en o zouez. Redek a rejont holl, spouronet, war-du an ode, hag en em waskañ eno. Ken foll e oa aet al loened-se gant ar spont, hag ar c'hi o harzhal outo an holl amzer, ma krapas un dañvadez war ar gloued, ha ma tistagas unan eus ar mein a zo eno.

**Jalm:** Hag ar maen a zo ruilhet war an oan?

**Andrev:** Ruilhet eeun warnañ.

**Jalm (trubuilhet):** Ch! ch! ch!... lazhet eo bet war an taol?

**Andrev:** Nann, e gaset am eus betek an ti.

**Jalm:** Pelec'h emañ bremañ?

**Andrev:** Astennet war ur bernig plouz en heol e-kichen an nor. Torret eo e gein, am eus aon.

**Jalm:** Ur gwalleur eo. Ur burzhud e oa gwelout pegen mat e teue. Eomp d'e gerc'hat da welout.

*Mont a reont er-maez. Jalm a zistro gant an oan en e zivrec'h. Azezañ*

*a ra war ur skabell izel, hag e flour goustad kein al loen. An den kozh a sell, ankeniet.*

Emañ o vervel. Torret eo e gein.

**Andrev** (*o stouñ hag o tastornat an oan*): Paour kaezh loenig! Klev 'ta, pegen prim e lamm e galon.

**Jalm**: Ne dalv ket ar boan e wadañ, — ken gwan ez eo!

**Andrev**: Nann. Lez anezhañ da vervel. O taskrenañ emañ, ar paour kaezh.

**Jalm**: Ar marv a zeu wamañ, me 'gred. Mouk e teu e zaoulagad.

**Andrev**: Ya, anat eo ez eo tost ar fin.

**Jalm**: sonnañ a ra e gorf... Marv eo.

**Andrev**: Gwell a se, pa na c'houzañvo mui.

**Jalm**: Pebezh loenig koant e oa! Hag ar gloan stank dija war e gein. Tomm eo c'hoazh.

**Andrev**: Un druez eo, un druez.

**Jalm**: Un druez, sur, un druez vras. 'Meus aon ez eo un arouez a drubuilh evidomp. (*Trumm*) Sell! Ret eo dimp kuzhat ar c'horf-mañ. Edo Yola e kounnar bremaik.

**Andrev**: Abalamour da betra?

**Jalm**: Abalamour da veur a dra. War an hent o tont d'ar gêrez eo aet kuit kammed ar rod; ken pell hon eus bet da c'hortoz e-tal ar c'hovel m'eo bet ginete abaoe.

**Andrev**: Gwelloc'h e ve kuzhat ar c'horf marteze.

**Jalm**: Mont a ran d'e gas d'ar c'halatrez. Un deiz all e lavarimp dezhi ar pezh a zo c'hoarvezet.

*Stagañ a ra da bignat gant ar skeul. Emañ c'hoazh war ar bazenn izelañ pa zeu Yola en-dro. Gwelout a ra an oan marv etre divrec'h he fried.*

**Yola**: Petra 'zo c'hoarvezet gant an oan-se? — klañv eo?

**Jalm**: N'eo ket.

**Yola**: Petra en deus neuze?

**Jalm**: Ne welez ket? Marv eo.

**Yola**: Marv! (*Sevel a ra he fenn etrezek an oabl; neuze e stou anezhañ trumm*) Tad Jezuz! Ha penaos eo bet lazhet?

**Jalm**: Ur gwalleur. Ne oa netra d'ober da virout.

**Yola** (*da Andrev*): Hag en anv Doue, petra edoc'h-c'hwi oc'h ober e-keit-se? Lavaret ho poa da Jalm ho pije taolet evezh e-pad ma vijemp e kêr.

**Andrev**: Ha se am eus graet. Gloazet eo bet e-tal ar gloued.

**Jalm**: Ur c'hi fery evel ur bleiz a zo sailhet e-kreiz ar park hag en deus spontet an defived. Gloazet eo bet hennezh.

**Yola**: Ha c'hwi ouzh o diwall! Ur bugel bihan a c'hellfe mesa ur bagadig defived.

**Andrev**: Hag e c'hellfe, sur a-walc'h. N'eus netra da damall din, koulskoude, bez' e c'hellit va c'hredañ.

**Yola**: Ha piv 'zo da damall neuze? Jalm, kredapl, — pe me, emichañs.

**Andrev**: Graet em eus gwellañ ma c'hellen da saveteñ an oanig.

**Yola**: Ya sur! Ur vezh eo, den kozh, ha c'hwi o c'houzout pegen berr ez eo an traoù ganimp d'ar c'houlz-mañ, ober dimp c'hoazh koll arc'hant!

**Andrev**: Arabat deoc'h hen tamall din, va merc'h. Rak petra eo divhar un den kozh e-kichen ur c'hi o redek?

**Jalm**: Gant n'eus forzh piv e c'hoarvezfe kemend-all.

**Yola**: Nann, Jalm, ne rafe ket, hag i o teurel evezh.

**Jalm**: Darvoudoù fall a c'hoarvez gant ar re wellañ ac'hanomp pa vezomp o vesa defived.

**Yola** (*kounnaret*): N'eo ket gwir. Mes ar re a vez servijet, ar re a vez graet war o zro, ar re o deus butun-korn ha butun-fri bep sizhun diwar goust ar re all, ar re-se ne reont ket kalz a van eus petra a c'hoarvez.

**Jalm** (*strafuilhet*): Peoc'h, peoc'h!

**Yola**: Chom peoc'h, te da gentañ.

**Jalm**: Da betra an diaoul e talv leñvañ d'al laezh a zo bet skuilhet?

**Yola**: Nann, mes ret eo dimp mont war hon daoulin, emichañs, dirak ar re a skuilh al laezh.

**Jalm** (*oc'h aspediñ e wreg*): Peoc'h, en anv Doue! (*Da Andrev, gant madelezh*) Arabat dit bezañ nec'het gant ar pezh a lavar. Kredañ a rafed o klevout kement a reuz ez eo un dañvad pe ur vuoc'h hon eus kollet, e-lec'h un oanig n'en doa nemet div sizhun hepken.

**Yola**: Brav e komzez, va faotr. Gellet hor bize koll an eil koulz hag egile. Ha n'eo ket dezhañ hon eus da lavarout trugarez.

**Andrev**: Da nebeut a dra on mat en ti-mañ, me 'oar. Mes hen touiñ a ran dirak an aotrou Doue, n'eus netra da damall din hiziv, — netra.

**Jalm** (*da zizoaniañ e dad*): Arabat dit bezañ nec'het; arabat dit bezañ nec'het. Den ebet, dezhañ un tammig skiant-vat, ne c'hellfe teurel an disterañ tamall warnout. (*Da Yola, un tammig gourdrouruz e vouezh*) Ur vezh eo dit, Yola.

**Yola (broc'het):** Brasoc'h mezh eo dezhañ, — an dra-se am eus lavaret dit meur a wech, — gwelout ur vaouez paour o poaniañ da sevel un tiad bugale gant netra, hag eñ chom amañ keid-all evit reiñ dezhi muioc'h a drubuilh c'hoazh.

**Jalm:** Peoc'h, va gwreg!

**Yola:** N'eus ket a beoc'h. Ar gwir am eus da vezañ klevet e-barzh va zi. Ma vefe skiant-vat pe vadelezh ennañ ez afe kuit, a-raok lakaat tabut da sevel en ti-mañ.

**Andrev (broudet):** A youl Doue na savfe ket tabut en ti-mañ pe e lec'h all en abeg din! Hogen, da belec'h ez afe un den kozh evel don?

**Yola:** Da belec'h, — da belec'h hoc'h eus lavaret?

**Jalm:** Serr da zivskouam ouzh komzoù garv hounnezh, va zad!

**Yola:** E-lec'h ma vo pledet ganeoc'h, ha m'ho pezo boued mat da zebriñ, ha tud paeet netra nemet evit ober noz-deiz war ho tro.

**Jalm (oc'h aspediñ):** En anv Doue, Yola.

**Yola:** Hag e-lec'h ne viot mui o tennañ bara diouzh genou ur vaouez hag he bugale, na diouzh genou den ebet.

**Andrev (tregaset):** N'eo ket... an... an ospital a fell deoc'h lavarout?

**Jalm:** Na selaou ket ur ger! Na ra ket, tad, na ra ket!

**Yola:** Ret e vo dezhañ selaou, — ha dit ivez.

**Jalm:** Va zad eo, — tad-kozh da vugale. Soñj, pa glevint un deiz...

**Yola:** Tud gwelloc'h egetañ a zo eno, — an dra-se am eus lavaret dit.

**Jalm:** Hini ebet eus ma c'herent n'eo bet eno biskoazh, — ha keit ha ma vo ur greunenn vara en ti-mañ, dezhañ e vo.

**Yola:** Ya, hag e vugale-vihan a varvo neuze gant an naon.

**Jalm:** Ne ran forzh. Diotachoù, netra ken!

**Yola:** Ne rez forzh! Ma, — r'en devo ar bara-se neuze, — r'en devo ar bara-se, hag evel-se 'vo kont! Dibabet ec'h eus etrezañ ha me, ha salv ma'z piye dibabet mat. Hogen me ivez a raio va dibab.

*Yola a gemer he frileuzenn diwar an tach; he gwiskañ a ra evel unan a ya d'ober ur veaj. Ar c'hoziad a sell outi, nec'het ma'z eo un druez.*

**Jalm (spontet):** Petra 'rez, Yola? Da belec'h e fell dit mont?

*Yola a ra ur pakad gant un nebeut dilhad prim-ha-prim hep respont.*

**Jalm:** Koll da benn a rez, moarvat.

*Yola a ya etrezek an nor.*

**Jalm (oc'h en em lakaat dirazi):** Yola, en anv Doue.

**Yola (ouzh e deurel a-gostez, droug enni):** Lez ac'hanon da dremen!

**Andrev (o pouezañ war e gomzoù):** En anv Jezuz hag E Vamm Santel,

na dit ket pelloc'h, maouez an ti-mañ!

*Yola a chom a-sav e toull an nor.*

**Andrev:** Chomit amañ da bleidiñ gant ar vugaligoù 'zo bet roet deoc'h gant Doue. Ma ne vefe toenn ebet nemet an doenn-mañ er vro, n'em befe ket ar gwir da chom, ha me o tispertiañ un ozhac'h diouzh e wreg. Labour fall ez eo, — labour daonet, hep mar ebet. Her gwelout a ran bremañ. Her gwelout a ran sklaer... Va lezit da chom amañ evit an noz-mañ nemetken, hag a-raok ma vo diskennet an heol warc'hoazh, e c'hellot bevañ e peoc'h amañ ho-taou.

**Jalm:** Nann, va zad.

**Andrev:** Peoc'h, va mab. (*Da Yola*) Tennit ar frileuzenn-se a-raok m'ho pezo roet ar skouer fall d'ar vugale a vo amañ bremaik.

**Yola (fromet):** Ha ma ran an dra-se, petra 'soñjot, c'hwi ha Jalm, diwar va fenn?

**Andrev:** Netra, va merc'h. Arabat deoc'h bezañ nec'het gant se. Madelezhus oc'h bet gwechall. Ar baourentez du — n'eo ket c'hwi — am c'haso pell diouzh an ti-mañ warc'hoazh.

**Yola (fromet en un doare souezhus-meurbet):** Ya, madelezhus on bet — madelezhus, daoust ma lavarer bremañ ez on ur vaouez kriz ha garv... Un amzer a zo bet ma c'hellen leñvañ d'ur c'hazh bihan oa bet beuzet... mes brevet eo bet ma c'halon o labourat er palud gleb, fall, daonet-mañ!

**Andrev:** E gwir, n'eo ket ur vuhez o deus an dud amañ.

**Yola:** Hen touiñ a ran, Andrev, n'eo ket me a damallfe deoc'h ho tammig bara ma'z afe gwelloc'h ar bed ganimp. Ha perak e rafen? Hogen pep tra er bed-mañ a zo o treiñ a-enep dimp. Hiziv end-eeun n'omp ket bet evit kaout ur sac'hadig bleud e kêr hep paeañ war al lerc'h. Jalm hel lavaro deoc'h...

**Jalm:** Gwir eo koulskoude...

**Yola (taer):** Va Doue! N'ouzon ket perak ez eus tud ken pinvidik, ha ni ken paour! N'eus ket unan eus va bugale en deus ur votez toull zoken da vont d'an oferenn d'ar Sul, hag e vez ar re all oc'h ober goap dezho d'al Lun!

**Andrev:** Kalet eo ho pubez, e gwir. Ha pell 'zo em bije dleet mont ac'han. Hogen don ez a gwrizioù ur wezenn goude pevar-ugent vloaz.

**Jalm (strafuilhet):** Mervel a ri du-hont da-unan-penn. Mervel a ri.

**Andrev:** Ne rin ket, va mab, ha goude ma rafen? Kerse a vo ganin, moarvat, bezañ pell diouzh ar vugale-vihan, ha pell diouzh ar maezioù

e-pad an nevez-amzer, — mes petra 'vem? — gant ma vo graet ar pezh a zo mat, petra 'vem? Laouen e vin o soñjal em eus graet mat... Emaon o vont er-maez bremañ d'ober un droig vale. Ezhomm am eus soñjal. Ha sklaer eo an oabl.

*Mont a ra, gwan-meurbet, etrezek an nor digor. Jalm a azez trubuilhet. Yola a laka he frileuzenn adarre ouzh an tach. Nora a zeu tre, prim evel ur bugel ma'z eo. Ur plac' hig koant dek pe unnek vloaz ez eo, du he blev, livrin he divoc'h. Diarc' hen eo. Ur vrozh lien tev he deus hag un davanjer ruz-sklaer. Ur c'habaz leun a levrioù a zo ganti. Redek a ra da-gaout he zad-kozh.*

**Nora:** O, tad-kozh, pebezh keloù evidout! Pebezh keloù am eus da gas dit!

**Andrev:** Petra 'ta, va merc'hig?

**Nora:** Sell! (*O furchal en he c'habaz hag o tennañ ur gelaouenn*) Lakaet eo bet war ar gazetenn. Merket eo bet e ruz gant ar mestr-skol. "Diskouez an dra-mañ da'z tad-kozh, Nora," emezañ, "ha lavar dezhañ am eus fiziañs e vevo betek kant vloaz en eürusted."

**Jalm:** Petra 'lavarez 'ta, Nora? O rambreal emañ?

**Nora:** Merket eo amañ war ar gazetenn, hag e lizherennoù bras. Votet eo bet al lezenn-se dec'h da noz er Gambr, emezañ.

**Andrev:** Petra 'zo bet votet, va merc'hig?

**Nora:** Tri skoed bep sizhun da bep unan er bed-holl en deus tremen tri-ugent vloaz. Leve ar Re Gozh, setu an anv a reer eus al lezenn-se, hervez ma lavar ar mestr-skol.

**Andrev (o krenañ):** O Nora, va merc'hig, gwir eo? Mat ec'h eus klevet, sur?

**Jalm:** O farsal eo bet ar mestr-skol adarre, — hennezh n'eo mat nemet d'ober goap eus an dud.

**Yola:** N'eus ket bet anv eus an dra-se a-raok?

**Jalm:** Eo, mes ne oa nemet evit c'hoarzhin. Ne oa den ebet evit krediñ e vije graet ul lezenn.

**Andrev:** Hag a belec'h e teufe kemend-all a arc'hant?

**Nora (taer):** Gwir eo, tad-kozh! Gwir eo. Moulet eo amañ. Me 'oar pelec'h ez eo moulet. Ro din ar gazetenn, tad.

**Yola (da Jalm, a zo bet o klask dre bajennoù ar gelaouenn hep kavout netra):** Ro dezhi ar gazetenn 'ta.

**Jalm (o klask atav):** Gortoz 'ta, gortoz... O, amañ 'mañ, amañ 'mañ. Mat he deus lavaret. Dall e oan, sur, pa ne oan ket evit kavout.

**Andrev (e zaoulagad o virviñ):** Lenn 'ta, lenn an dra-se din, Jalm. Lenn 'ta, va mab.

**Jalm (goustadik):** "Al lezenn diwar-benn Leve ar Re Gozh a zo bet votet dec'h da noz."

**Andrev:** Lenn 'ta, — lenn 'ta, Jalm.

**Jalm:** "Er c'hornad-mañ dreist-holl e vo deut mat ar c'heloù. Evit milionoù a re gozh, paotred ha merc'hed, n'o doa netra da yevañ betek-henn, ur vuhez nevez e vo. Ar Gouarnamant en deus roet ar frankiz d'ar re gozh. Lear en deus adkavet e dra en diwezh!" Ne gomprenan ket an dra-mañ, mes n'eus forzh.

**Andrev (o tridal gant al levez):** Lenn 'ta, lenn 'ta, va mab.

**Jalm:** Div linenn 'zo c'hoazh. "Ma n'en dije ar gouarnamant graet netra nemet al lezenn vat-se, gounezet en dije hor fiziañs." ...Ma, petra 'lavarez, tad?

**Andrev (fromet):** Meulet ra vezo Jezuz hag E Vamm Santel!

**Nora (lorc'h enni):** Ha n'em boa ket lavaret mat? Hag hini ebet ac'hanoc'h ne felle dezhañ krediñ da gentañ!

**Jalm:** Mat ez poa lavaret, Nora.

**Yola:** Ar wirionez a oa ganit.

**Nora:** Deut on d'ar red ken buan hag an avel. Me 'ouie e vefe tad-kozh tost da goll e spered gant al levez. (*Da Andrev*) Ha bez' ez out ivez, — sell 'ta, da zaouarn o krenañ!

**Andrev (trelatet):** Doue ra vo meulet! Sellit ouzhin, ur pennad 'zo, ha sellit ouzhin bremañ. Ur c'hlasker-bara e oan neuze, ha bremañ on evel ur roue gant arc'hant da zioueriñ bep sizhun eus ar bloaz.

**Nora (touellus):** Seizennoù a breni din, tad-kozh, hag ur grib da lakaat em blev.

**Andrev:** Hag e rin, va merc'hig, — ha muioc'h c'hoazh... butun kreñv dalc'hmat, hag e-leizh... sukr heiz evit ar vugale... un oferenn ur wech an amzer evidon... (*O tennañ e dog gant doujañs vras*) Gloar da Zoue e-kreiz an Neñvoù en deus dalc'h et soñjal ac'hanon e fin va buhez!

*Mont a ra etrezek an nor en ur grenañ, ken fromet ez eo. Ret eo dezhañ ehanañ evit tennañ e alan.*

**Jalm (prederiet):** Taol evezh, tad. Da belec'h e fell dit mont bremañ?

**Andrev:** Da gas ar c'heloù da Jani. (*Outañ e-unan*) O, Doue ra vo meulet!

**Jalm:** N'hellez ket mont pell. Sell 'ta, na krenañ a rez. Chom un tammig da zisizhañ ha lez ar souezh da dremen.

**Andrev (diseblant):** Jani a vo lorc'h enni bremañ. Arc'hant e-leizh

bemdez c'houlou da zispign! Biskoazh kemend-all!

*Mont a ra er-maez, trelatet gant al levenez.*

**Jalm:** Nora, va merc'hig, kae gantañ gant aon na gouezhfe.

**Nora:** Seizennoù brav a breno din, hag ur grib da lakaat em blev. Ha ne vo ket brav? A-benn Kala-Mae em bo anezho, marteze.

**Jalm:** Hast afo, Nora! Ne blij ket din e lezel e-unan-penn e-giz-se.

*Nora a ya kuit.*

Keleier trumm evel-se n'int ket mat evit ar re gozh.

**Yola:** Kollet en deus e spered.

**Jalm:** Paour kaezh den.

**Yola:** Foll eo, koulz lavaret.

**Jalm (tener):** Doue r'en devo truez ouzhimp!

**Yola:** E zaouam, — gwelet ec'h eus na krenañ a raent; a-vec'h ma c'helle derc'hel e vazh.

**Jalm:** N'eo ket souezhus, paour kaezh den. Tenn e ve bet dezhañ mont kuit warc'hoazh.

**Yola (gant keuz):** Arabat dit komz eus an dra-se bremañ; kemmet eo pep tra. Kant vloaz e c'hall c'hoazh bevañ hep ma kavfen netra da lavarout.

**Jalm:** An aotrou Doue binniget en deus graet an dra-se evidomp.

**Yola:** Ne vo mui heñvel hor buhez tamm ebet diwar bremañ. Sofij, tri skoed o tont en ti-mañ, n'eo ket ur sizhun pe div sizhun hepken, hogen bep sizhun betek ma vo galvet da Zoue. Ha netra, — nag amann, nag heiz na foenn, — netra da reiñ en eskemm. Madelezhuz eo bet an aotrou Doue ouzhimp, e gwir, ha ni er stad ma edomp.

**Jalm:** Gwir eo, gwir eo, diwar hiziv e vezo peoc'h hag aezoni en ti-mañ.

**Yola:** Hage vo, — gant gras an aotrou Doue; ur samm kaer a drubuilhoù a zo bet lamet bremaik diwar va choug.

**Jalm:** Ha diwar va hini memes tra.

**Yola:** Biken ne vin pardonet ganit, Jalm, 'm eus aon.

**Jalm:** Peoc'h, va merc'h, — tremenet eo kement-se... Bremañ ez an er-maez da welout petra 'c'hoarvez e-pad ma vi oc'h aozañ koan. Naon am eus.

**Yola:** Ha n'eo ket souezh. Mes brav eo an tan bremañ, ha prest e vo koan hep dale.

**Jalm (war an treuzoù):** N'eus ket da lavarout: deut eo an nevez-amzer evit mat. Brav eo. Sed aze un alc'hweder o sevel en ur ganañ. Deus amañ 'ta da welout, Yola.

**Yola (o sellout, evel gant daoulagad nevez):** Doue! Piv a lavarfe ez eo bet biskoazh ar goañv amañ!

**Jalm:** Ya... sell 'ta! Perak e teu Nora en-dro, tizh wami?

**Yola:** Ha d'ar red, me 'lavar!

**Nora (o tegouezhout e toull an nor):** O, tad, tad, un dra bennak a zo c'hoarvezet gant tad-kozh!

**Jalm ha Nora (strafuilhet o-daou):** Petra 'lavarez? Petra 'zo c'hoarvezet?

**Nora (o leñvañ):** Edomp o tiskenn hon-daou gant an hent bihan, hag eñ o pediñ hag o c'hoarzhin outañ e-unan bep eil tro. Aet oan da gutuilh bleuñf-nevez war ar c'hleuz, hag o treiñ va fenn em eus gwelet anezhañ o trabidellañ hag o kouezhañ evel unan o kaout ur gaouad.

**Jalm:** Jezuz! Ha droug en deus bet, Nora?

**Nora (glac'haret):** O, n'ouzon ket. Klasket em eus e sevel, hogen ne oa netra d'ober. N'on ket kreñv a-walc'h. O, red, red, tad, aon am eus!

**Jalm:** Gant na vo c'hoarvezet droug ebet!

*Mont a ra kuit buan. Yola a stag da gempenn ar bank e-giz ur gwele.*

**Nora:** O, paour kaezh tad-kozh, paour kaezh tad-kozh!

**Yola:** Ha lavaret en deus dit un dra bennak e-pad ma edos o kas e sevel?

**Nora:** N'eus ket, — nann, n'eus ket, — netra, nemet rambreal.

**Yola:** Diwar-benn petra, Nora?

**Nora:** N'ouzon ket, — o lavarout traoù iskis e oa.

**Yola:** Daoust ha lefivañ a rae, — pe daoust hag o klemm e oa abalamour d'un dra bennak?

**Nora (glac'haret):** O nann, mamm, hogen, — aon am eus.

**Yola:** N'ec'h eus ket aon da gaout. Perak ez pefe aon?

**Nora:** Aon am eus na varve.

**Yola:** Peoc'h 'ta, diodez ma'z out! N'eus ket aon da gaout evit se.

**Nora:** O, aon am eus evelato. Ken disliv e oa hag ur gantol goar. Ha ne ve ket spontus, mamm, ma'z afe da vervel e-giz-se? Ne ven ket gouest da c'houzafiv gwelout unan bennak o vervel, — ne ven ket gouest.

**Yola (tener):** Arabat dit bezañ nec'het, va merc'hig!

**Nora (spontet):** Peseurt trouz a glever?

*Trouz kammedoù un den o tougen ur bec'h pounner a glever war ar mein er-maez.*

**Yola (o vont buan d'an nor):** Jezuz binniget! Setu amañ Jalm gant e dad war e zivrec'h. (O komz er-maez) Peseurt droug a zo c'hoarvezet, Jalm, — gloazet eo?

*Mont a ra er-maez da reiñ dorn d'he fried.*

**Jalm** (*teñval*): Peoc'h, n'ouzon ket, — n'on ket evit kompren. Ar souezh a zo bet re vras evitañ, me 'gred.

**Yola** (*o klask d'zoaniañ he fried*): N'eus nemet e astenn amañ, ha dont a ray ennañ e-unan bremaik. N'eus aon ebet da gaout.

*Jalm a astenn e dad gant evezh bras war ar bank. Sioul-meurbet eo an den kozh, serret e zaoulagad, morlivet.*

**Yola** (*spontet trumm*): Gwerc'hez vinniget! Spontus eo da welout!

**Jalm**: Liv ar marv eo. (*Da Nora, a glask diarbenn ar spont dre guzhat he dremm gant he daouarn, e korn pellañ ar gambr*) N'ec'h eus ket aon da gaout, Nora. Deus 'ta, deus 'ta, va merc'hig. (*Sevel a ra he fenn, aonik*) Ret eo dit mont diouzhtu da glask ar beleg. N'eus hini ebet a c'hall mont nemedout.

**Yola**: Kae buan, Nora.

**Nora** (*abafet, hogen douget gant ur galloud kreñvoc'h egeti da dec' hout pell diouzh ar skeud-se o teñvalaat*): Mont a rin, — o, mont a rin, — petra am bo da lavarout?

**Jalm**: Lavar ez eo klañv da dad-kozh, — war e dremenvar marteze, — ha lavar dezhañ dont buan.

**Yola**: Kemer an hent bihan da skeiñ berroc'h a-dreuz.

**Nora** (*o teurel ur sell buan en a-dreñv*): Paour kaezh tad-kozh!

**Jalm**: Hast afo, Nora.

*Nora a ya diwar wel.*

**Yola** (*goude ur pennad*): Daoust ha n'eo ket iskis, ken sioul ez eo?

**Jalm** (*e zorn war dal an den kozh*): Re sioul, am eus aon, re sioul, Yola... (*Tener*) Paour kaezh tad... savomp anezhañ un tammig.

*E sevel a reont un nebeudig.*

**Jalm**: A-walc'h, Yola... Mat.

**Yola**: Muioc'h en e aez eo bremañ.

**Jalm** (*ankeniet, — goude ur pennad*): Biken n'en em denno.

**Yola**: Me 'lavar dit e ray.

**Jalm**: Nann, Yola, sur eo.

**Yola**: Sell, emañ o tont en-dro.

**Jalm** (*o selaou gant evezh*): O peoc'h, peoc'h! O komz emañ.

*Adarre e klever evned o richanañ.*

**Andrev** (*ur sked o parañ war e zremm*) Arc'hant, arc'hant e-leizh...

*butun mat... seizennoù da Nora, — seizennoù brav... (Da Yola)*

*Daoust hag ul labous eo a glevan, Jani?... An nevez-amzer... An nevez-amzer...*

*Tremen a ra, sioul-meurbet, evel ma tremen un aezhenn. Ar c'han a zo tavet. Ur paouez.*

**Jalm**: Marv eo.

**Yola**: Marv eo.

**Jalm**: Paour kaezh tad!

**Yola** (*o treiñ a-gostez, c'hwerv*): Ur mare fall en deus dibabet da vont kuit.

**Jalm** (*prederiet*): Paour kaezh den! Doue r'en devo truez ouzh e ene!

**Yola**: Gwennege ebet eus e leve bremañ!

**Jalm**: Pebezh sioulded a zo deut warnañ!

**Yola**: Ha bremañ, dispign arc'hant evit ar veilhadege hag an interamant!

*Va Doue, penaos e raimp-ni?*

**Jalm** (*trelatet*): Hefivel ouzh ur sant ez eo. Ra baro sklerijenn an Nefivoù war e ene!

**Yola**: Da zebrif ha da evañ da ur bem tud. Butun-korn ha butun-fri.

*Kantolioù koar. Rivinet e vimp diwar bremañ, Jalm.*

**Jalm** (*dievezh*): Petra 'lavarez, Yola?

**Yola** (*droug enni*): Petra 'lavarant? Kollet e vimp diwar an deiz-mañ!

*Kollet da vat ha da viken! O, pebezh poent fall en deus dibabet da*

*vervel!*

**Jalm** (*sioul*): Youl Doue ez eo, Yola; n'eo ket eñ en deus dibabet.

**Yola** (*gant un huanad*): Gwir eo marteze. (*Gant keuz*) Doue r'en devo

*truez ouzhin, — n'ouzon ket petra 'lavarant... (Goustad) Kae da glask*

*tud an ti all da reiñ dom din da gempenn pep tra.*

**Jalm**: D'an daoulin da gentañ, ha pedomp evit e ene.

*Daoulinañ a reont.*

(Embannet evit ar wech kentañ e stumm ul levr, e *Levraoueg Gwalarn*, e 1927)

# C'HOARIVA

bet savet war-eeun gant Roparz Hemon

– embannet gant *Al Liamm* –

+ **C'hoariva I** [212 pajenn, 45 lur]

(Lina ; Un den a netra ; An tan e ti Kernaspreden ; Dour ar C'halvar ;  
Meurlarjez ; Fest al leue lart ; Ur bugel a zo ganet ; Roperzh Emmet ;  
Biniaouer ar glav hag an heol)

+ **C'hoariva II** [246 pajenn, 47 lur]

(Ar bank Oaled ; An domad plouz ; An ael aour ; Perig ha Gwi-  
gnolig ; Ar gweladenner eus ar stered ; Valerian ha Valerian ; An  
Intañvez Barv Glas ; An Diaoul da Ael-Mat ; Bisig, kazh markiz  
Landeme)

*Al levrioù-mañ zo da vezañ kavet er stalioù-levrioù mat ha dre lizher  
e ti an Dll J. Queillé, 20 rue du Petit-Trotrieux 22200 Gwengamp*

